



## ARGADEN SOZON

— 0 —

Ce chant porte le n° 91, page 35, de la collection de Penguern, déposée à la Bibliothèque Nationale. Les critiques ont cru pouvoir dire qu'elle était apocryphe et l'attribuer au barde lettré Kerambrun, un trécorrois qui aurait mystifié plusieurs fois M. de Penguern. D'après M. Hervé Le Menn, qui a étudié en connaisseur le Manuscrit à la B. N. la supercherie est impossible. En effet, ce chant se rencontre 4 fois dans la fameuse Collection (inédite), deux fois sous le titre *Argaden Sozon*, et deux fois *Otro Goayon*. Voici la copie textuelle faite pour nous par Le Menn.

Hoghen burzud, arru e ar Sozon.  
Klevet ran an trompill o son.

Arru int pemp kant war o listri  
Pedomp Doue d'on sikouri.

Arru int pemp kant en eur vanden  
Ha n' on deus den evit on souten.

Allas redomp oll d'ar c'hoajo  
Groague paour ha bugaligo.

Muioc'h digar e ar Sozon.  
Vit ar goel loened direzon.

War al lec'hid emaint pemp kant  
Diskennet deus o batimant.

Tanan, la'chan rant dre ar vro  
Na den abed n' on sikouro.

Otro Goarin war e varc'h bras  
Ha pa neus klevet a saillas,

E zaoulagad rond en e benn  
Evel daoulagad eur gaouen.

Hoghen burzud, piou a heulio  
Otro Goarin d'ar brezelio ?

Et e tresek ar forbanet  
Gant daou ughent a soudardet

E gleze bras eus e goste  
Skrouinial a ra e ancane.

Ag an oll bopl war o daoulin  
— Pedomp vit an Otro Goarin.

— 119 —

Retorn a ra Goarin d'ar ghet  
Hag en hanval eus eur c'higher.

Ar goad o ruill dre e vempro  
Ha war e zillad ag a stro.

Ouspen daou c'hant a zo lac'het  
A kement all a zo nec'het ;

Otro Goarin, hoghen burzud  
Enor d'ide a das oll dud.



## NEVEZ - AMZER

Gant Y. TILLENON (Louzaouer)

*Nevez-Amzer a gan en er,  
Me a glev iouc'hal er pellder,  
En Heol tomm duze c'hoarier  
C'hoarzer, tanser, en em blijer.*

*An evned a gan laouenoc'h,  
Ar gwez zispak nerzen grenvoc'h,  
Ar Bleuniou zo kaeroc'h livet,  
Kement tra zo skedus, mezvet.*

*Gant oabl digatar tec'h ar gliz,  
Teu sourrou avel ken iskiz,  
Me ia, me red, dre an draonien,  
Nerzet me gan, me zo laouen.*

*Trez an ôd zo lustret, gwenneet,  
Ar mor kounnaret zo donveet,  
Ar moraër gant nevez-amzer  
A gavo eun tamm habaskder.*

*Disul, koëfou dantelezet  
Nije war saëiou skler livet,  
Merc'hed ha potred ken seder  
'N em boke da Nevez-Amzer.*

*An Nevez-Amzer zo en Breiz :  
Neiziou ha pardonioù e-leiz.*